

# CANTIC

## AN OTRO SANT ROCH,

Voar ton Sant TANGUY a Santès EODÈTTE.

1.

Cannomp gant melodi, cannomp gant joaüstet  
Eur hantic neve flam bars en gloar an Drindet  
En enor da sant Roch, servijer da Zoue  
En deus evit partaj rouanteles an êe.

2.

En eur hartier a Franç, er guer a Langedoc,  
A dut a ligne vad eze ganet sant Roch  
È dad voa hanoed Yan, e vam a voa Tiber  
A re o demeurans er guer a Vonpeller.

3.


Sant Roch ne heuille quet en pad e yaouanquis  
An dans ac an ébat evel ma man ar his;  
Occupped de a nos gand Doue er beden,  
O castian e gorf gand yun a pinijen.

4.

Goude maro e dat, e voersas e voyen,  
Ac e tistribuas an arhant d'ar beoyen,  
Neuze gousquet en paour e quemer pen an hent,  
En eur laret adieu de vro a de guerent.

5.

Evit monet da Rom da ober e beden,  
Voar be an ebeste, a re ar Verzerrien  
Pa arias en Rom en eur laquas ractal  
Da serviji an dut clan ebars en ospital.



**6.**

Eur vosen araget aré en amzer man  
Ravaj ar guer a Rom ac er herrio nissan,  
Sant Roch dre zin ar groas eb remet al abet  
A oëllaé tut clan ac a re ar yehet.

**7.**

Houi a zo admirabl ma Jesus ma otro,  
Dreizoch e teu ar sent da ober miracl;  
Groed eur memeus miracl en andret on ine:  
Reit ar yehet dont horf a ners don harante.

**8.**

Doue a bermetas ma vije afflijet  
E servijer fidel ive gand ar hlevet  
Ouspen an derrien dom evit lavaret guir  
Evorzet voé treuzet ive gant eun ten pirr.

**9.**

Goude bean groet yach e quomeras ezin  
Evit distrein de vro en guis deur pelerin  
Mes chom a eure clan en eur hoat estranjour  
Elech na guele den da rein dean sicour.

**10.**

Setu aze penos eo tretet gant Doue  
Are pere é deus vitan gouir garante;  
Mes qui un dezentil a hane deus ar vro  
Adigas se deau bara ene heno.

**11.**

Doue en deus souffret nombr bras a soufranso  
Azo evidomp oll antreet en envo.  
Ma Doue, houi so mad houi so caranteus  
Na servijin biquen nemerdoch ma Jesus.

**12.**

Bras eo, o ma Doue, bras eo o Providans!  
Me a laqou enoch ive ma oll fian; ;  
Erfin dre gals a boan a dre gals a viser  
En eum rentas er guer demeus a Vompeillier.

**13.**

Mes commèret evoc evit un espion  
Ma oë laquet ractal ebars en eur prison  
Sant Roch so inosant ac a so prisoniet,  
Laquet er bassefos eb bean meritet.

**14.**

A me, o ma Jesus! corrompet a behet,  
Ne fell din souffr netra gant gnir basiantet,  
Gourveet voar ar plous guisquet fal dierhent  
Sant Roch ne lavar guir na da zen ne neum glem.

**15.**

Chom a ra er guisse pemp bla en e brison  
Eb cavet diant den neb consolation  
En obstant de ol boan en eur gaf hoas ouспен  
Da vean afflijet ive gant ar vossen.

**16.**

Santout a re e voa ari tost d'an termen  
Ma haze da receo en env e gurunen  
Da vont da finisan e dourmancho griec  
Da gafout eur bonheur na ne finisso quet.

**17.**

Quent couittat ar betman ebars ene brison  
E heure e beden da Doue a Galon  
Evit a re pere a vije afflijet  
Gant clevejoe stranj a danjérus meurbet.

**18.**

Diganec'h e houllan ma Jesus, souveren,  
Evit are vo clan gand flug, ac ar vossen  
Ma defo soulajamant eno affliction  
Pa deuont d'ampedin deus a greis o halon.

**19.**

Mervoël a ra neuse evel ma varv ar sent  
Er blaöës trizec cant da seis bla voarnugent  
E ine evurus a voe gant joaustet  
Douget gant an ele da veulin an Drindet.

**20.**

Goude ma va maro e voe anaveet ,  
Dre eur groas a oa voar e gorf inprimet ,  
An ol bian a bras a rent dean neuse  
An enor na renter quet memeus d'ar Rouane.

**21.**

Deus e gorf presius nep a ellai tostad  
Da guemer Relego ac ive e ziliat  
Guir eo, o ma Jesus, ar pes o'heus laret  
Neb a neum izelayo a vezo uellet.

**22.**

Canomp gant joaustet, canomp gant meulodi  
Da Doue, da sant Roch a d'ar Verhes Vari,  
Na ne sessomp james o veuli nn Drindet,  
Ennes eo guir deveur an ol gatoliquet.

**23.**

Pedomp ol ar sant man demeure a vouir galon  
Ma teuio don sicour é ou affliction  
Bras eo e buissans en quefer un Done  
Ma rag yehet don horf a ive don ine.

*Propriété de l'auteur.*

R. P.

